

GUERZ GWIRION KATHEL GOLLET*Kendalc'h ha fin.*Tos : *Kantik an diaoul mud.*

167

675
 1 D'an noz goude m'oa tremenet,
 En ti ma rentaz he spered,
 O tra skrijus! edoug an noz
 Ne chellas den ebet repoz.

2 Kement skabel a oa en ti,
 An arrebeuri, al listri,
 A ioa taolet ha distaolet
 Gant eun trouz estlamus meurbed.

3 Plac'h all an ti, sayet mintjin,
 A welas e kreiz ar jardin
 Evel eur vaonez o leski
 E kreiz an ti en dro d'ezhi!

4 Neuze ar plac'h strafilhet bras,
 En eur greva al lavaras;
 « En han' Done e choullennan
 Piou aze zo e kreiz an tan! »

5 Ar vaonez paour a respontaz,
 En eur lenva e lavaras:
 « Me eo Kathel, an danserez!
 Ha deach c'hiez ho kamaladez! »

6 Kondaonet oun gant al Lezen
 Da boaniou skrijus an ifern —
 Va dourn en doa gret ar pec'hed
 Ha ya zeod en deuz he nac'het!

7 Gant Mari Madalen oun bet
 Beteg daonuzek gwech keleennet
 D'ober eur gwir goyesion,
 Hag ec'h assure d'in pardon.

8 Eur morian du, kriz ha lostek,
 Estlamm gant e dreid krabanek,
 En eur chourdrouz terri va fenn,
 En deuz sercet ya ginou krenn!!!

9 Malloz d'ar gwall gompagnunez,
 D'ar sonnerien ha d'an nosvez!
 Malloz d'an dans, d'an assambleou!
 Zo bet kiriek d'am pec'hejou!

10 Na bedit ken 'ta evidon:
 Me zo en ifern, daonet oun!!!
 Stlejet oun, siouaz! gant Satan
 Evit leski e kreiz an tan. —

11 Klevit, kristenjen, klevit piz,
 Pep pec'hed kovesait hardiz;
 Ma sentit ouz an dronk-spered
 E-giz Kathell c'houi vo kollet.

Echu.

An histor-ma, tennet euz leor great gant an Tad Delrio, a zo gwir hervez leor an « Exercisou Kristen », hag a zo het c'hoarvezet e bro an Indez sao-heol, e kear Itara, er blavez 1560. — Dre-ze lakit douz ar gentel en ho kalon.

GUERZ GWIRION KATHEL GOLLETTos : *Kantik an Diaoul.*

167

12 E mestrez vad ha truezas,
 Pa velas e stad ankenius,
 A lavaras d'ezhi: « Kathell
 Merc'h ker, red eo mervel. »

13 Sellit piz en ho koustians,
 Ha kovesait hep dismegans
 Evit ma vo kaer hoch'ene
 Da vont dispoint dirag Done.

14 Galvet e voe eun Tad santez
 Evit dont da welet Gathell;
 Kovez a ra ar glanvourez,
 A jom atao leun a enkreuz.

15 En noz goude ma kovesas
 E welas eur sklerijen vras!
 Goude-ze eun introun e gwen
 A gomzas out-hi evel-hen:

16 « Va selaouit, paour keaz Kathell,
 Echu ho puez, red eo mervel!
 Ha me eo Mari Madalen,
 Alvokadez ar bee'herien.

17 Kovesait c'hoas, hep mank cbet;
 Rak eur pec'hed ho peuz nac'het!
 Taolit kuit ar pec'hed kuzet,
 Pe' autramant e viot daonet!!!

18 Klask a rear an Tad a nevez
 Evit kovez ar glanvourez;
 Mes e zeod a zo liamet
 Gant an diaoul-mud, var eur pec'hed

19 Setu d'an taol a hanter noz
 Pa ne chell Kathell repoz,
 E istroas Mari-Madalen
 Da gomz c'hoas out-hi evel-hen.

20 « Oh! Kathell, petra 'peuz gret?
 Eur gwal bee'het ho peuz kuzet!
 Nac'het ho peuz an ampoezon
 A vo kazo d'ho taonasion.

21 Antronoz araok goulou de
 Tad e ene 'deu adarre
 Evit rei d'ezhi an nouen
 Hag eun diveza absolven.

22 An Tad o tont ebars an ti
 A lavaras a-grenn d'ezhi:
 « Ma n'eo dizoursi ho spered
 Dizamit-henn hep aoun chet! »

23 Lavarit frank, hep nac'h netra;
 Deut eo an termen diveza
 Taolit evez... hastit affo...
 Araok eun heur c'houi zo maro!!!

24 Eur vech c'hoas Mari-Madalen
 Zo digwezet en he c'hichen.
 Ha deuz ar c'hostez deou d'ezhi
 Evel-hen e komzas out-hi:

25 « Kathell, c'houi siouaz! ho peuz gret
 Eur pec'hed vil ha milliget!
 Kovesait-henn gant keuz parfet,
 Ha me bromet e viot salvet! »

26 Mes azioch d'ezhi, en tu kleiz,
 E tilammass eul loan direiz!
 E zremm e-giz eur siminal.
 E dreid 'vel re eun aneval.

27 En e zorn e ioa eur chleze
 Saret dirag penn ar plac'h-ze:
 « Ma kovesez, me d'ha lazo!!!
 Ma ne rez ket, me d'ha garo. »

28 Spountet neat gant an drong-sperek,
 Gathell a vary en e fech'ed!!!
 Ha mont a rank dirag Jesus
 Gant e beac'h pouunner ha mezus!

(No aendrec'hel)